

## Kartenn Europa treuzfurmet get ar brezel

Perak e kas ar gartenn nevez a Europa kement a gudennoù etre ar Stadoù?

War-lerc'h ar brezel e voe bet 5 feur-emglev sinet etre ar stadoù-trec'h hag ar re drec'het. Ar re drec'h a lakaas da dalvezout o c'hoantoù.

deiziad	Anv an feur-emglev	Stad trec'het
Even 1919	Versailhez	Alamagn
Here 1919	Saint-Germain	Aostria
Du 1919	Neuilly	Bulgaria
Even 1920	Triano	Hungaria
Eost 1920	Sèvres	Turkia

5<sup>e</sup> édition      ÉDITION DE PARIS      5<sup>e</sup> édition

Le Petit Journal      DIMANCHE 29

# LA PAIX DU DROIT EST SIGNÉE

## Hier, à Versailles, 1919 a effacé 1871

**CONGRÈS DE LA PAIX**  
VERSAILLES 1919

**Le Congrès de la Paix**  
Hier, à Versailles, 1919 a effacé 1871

**Les Allemands signent**  
une étreinte

**PAIX CONGRÈS**  
VERSAILLES 1919

**LA GRANDE CONFÉRENCE**  
Hier, à Versailles, 1919 a effacé 1871

**LA NATION**  
Versailles aux Français

**LA CONGRÈS**  
Hier, à Versailles, 1919 a effacé 1871

**Capitulation de Vienne**

**L'entrée des délégués**

**Le soldat de la paix**

**LA CONGRÈS**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

**Le Congrès de la Paix**

Michel, enlève ta veste !

Ton pantalon, s'il-te-plait !

Et ton chapeau.


Et maintenant, vides tes poches.

**Le traité de Versailles : caricature allemande**  
Caricature de Hans Lindoff dans *Kladderadatsch*,  
18 janvier 1920.

# Sinadur feur-emglev Versailles e Galeri ar melezour er c'hastell Versailles 28 a viz Even 1919

Au centre : Clemenceau, président de la Conférence ; à sa droite, Wilson ; à sa gauche, Lloyd George. Tableau de sir William Orpen, Imperial War Museum.





## Diell 1

1. War ar gartenn a-zehoù, livit e glas ar Stadoù nevez krouet.
2. Livit e du Alamagn àr ar div gartenn.
3. Livit e gwer Aostria àr an div gartenn.
4. Livit e ruz Rusia àr an div gartenn.
5. War ar gartenn a-zehoù, livit e glas an tiriadoù gounezet get frañs, Italia ha Roumania.


Bilañs: piv a oa trec'het e-barzh ar gartenn nevez?

Etre 1919 ha 1920 e voe kloz ar Brezel Bras get ar 5 feur –emglev sinet get ar re drec’het. Treuzfurmet eo kartenn ar c’hevandir europa get mont da get an Impalaeriezh alaman, Aostria-Hungaria , Rusia hag otoman hag e kollant kalz a diriadoù. Ganet eo Stadoù nevez èl Tchekoslovakia , Yougoslavia, Polonia, Finland ha 3 Stad nevez tro-dro ar Mor Baltek: Estonia, Letonia ha Lituania. Koll a reas Alamagn Elzas-Loren. Met ar feurioù-emglev-mañ a gas bec’hoù nevez:

- Ar feur-emglev Versailles a zo evit an Alamaned drastus:
- Kiriek ha kablus eo Alamagn( rann 231)
- Harzoù: koll a reas Elzas-Loren, trapas Dantzig, lodenn reterel da lâret eo 15% ag an tiriad
- Milourel: arme get nemet 100 000 soudard, rannvro ar Rein disoudarded ha dalc’het e-pad 15 vlez.
- Ekonomikel ha sokial: Saar da Frañs , paeañ **digolloù pounner** –tre d’an drec’hourien (132 miliard marks = 3,5 blezad gopr da vout paet e 30 vlez)

## ARVARUS E CHOME AR PEOC’H

- Ar feur-emglev evit an Alamaned: “Diktat” a raent anezhañ.
- Minorelezhioù broadel a chome edan galloud ar Stadoù (Alamaned ar Sudetoù e Tchekoslovakia), Kroated, Bosniiz, Slovaked.
- Italia: n’he deus ket bet Dalmatia
- SUA a nac’has siniñ emglev Versailles ha kemer perzh er KAB(SDN).



**Les réparations vues par les Allemands.**

Caricature de Simplicissimus, 1922.

An **digolloù** skeudennet get an Alamaned

« Jamais n'a été infligée à un peuple, avec plus de brutalité, une paix aussi accablante et ignominieuse qu'au peuple allemand la paix honteuse de Versailles. [...] Une paix sans négociations préalables, une paix dictée comme celle de Versailles n'est pas une vraie paix [...]. La paix de Versailles nous a ravi plus de soixante-dix mille kilomètres carrés et plus de sept millions d'habitants. Pour garder le géant enchaîné, on a mis deux sbires à ses flancs, la Pologne et la Tchécoslovaquie, qui ont reçu le droit d'augmenter librement leurs forces militaires, tandis que notre armée, autrefois la plus forte et la plus brave du monde, était réduite à n'être qu'une force de police à peine suffisante pour maintenir l'ordre intérieur. »

Chancelier Prince Von Bülow (Homme politique et diplomate allemand), *Mémoires*, Plon, 1931.

**Diell 2: elfennoù Feur-emglev Versailles 28/06/1919**

Rann 42,43: arabat eo da Alamagn mirout pe sevel difennoù àr ribl kleiz ar Rhin na àr ribl dehoù e kornôg ul linenn treset 50 km eus reter ar stêr.

Rann 51: an tiriadoù roet da Alamagn e 1871 e vo roet en-dro da Frañs a-dal d’an 11/11/1918

Rann 80,81,87: anavezout a ra Alamagn dieubidigezh ha harzoù Aostria, Tchekoslovakia ha Polonia.

Rann 119: dilezel a ra Alamagn he galloud àr he zrevadennoù tramor.

Rann 160: Ne C’hello ket arme Alamagn bout enni oc’h penn 100 000 den.

Rann 171: arabat eo sevel tankoù.

Rann 173: ne vo ket a servij-soudard ken.

Rann 198: ne vo ket a girri-nij en arme ken.

Rann 231: anzav a ra Alamagn ez eo-hi ha he c’henvrezelourien kiriek eus an holl golloù hag eus an holl distrujoù gouzañvet get ar gouarnamant unanet, abalamour d’ar brezel int bet rediet da ren a-enep tagadenn Alamagn hag he c’henvrezelourien.

Rann 232: goulenn groñs a ra ar gouarnamantoù unanet ha prometiñ a ra Alamagn ma vo adkempennet an holl distrujoù gouzañvet get poblañs ar Re-Unanet.



frontières de l'Allemagne dessinée par le traité	territoires administrés par la SD
territoires perdus par l'Allemagne	<i>Dantzig : accès libre au port pour la Pologne</i>
zone démilitarisée	<i>Sarre : exploitation par la France des mines de charbon pendant 15 ans à titre de dédommagement</i>
occupation militaire alliée pendant 15 ans	

**3: Alamagn da vare ar feur-emglev Versailles**

1. Diell 2 ha 3: petra eo an tiriadoù sellet er rann 51?.....

2. Diell 2: Roit tri skouer a ziskouez ar c’hastizoù miloure?.....

.....

3. Diell 3: Penaos emañ koñsideret seurt feur-emglev ? Perak ne c’helle ket Alamaned’zo degemer seurt feur-emglev le-sanvet **“diktat”( diviz-ret)**?.....

.....

**Diell 3: feur-emglev Versailles barnet get un Alaman:**  
“Biskoazh n’eo ket bet ur bobl rediet da blegiñ d’ur peoc’h ken mantrus ha ken mezhus get kement a feulster.... Ur peoc’h hep rakdiviz, ur peoc’h dre ret èl hini Versailles a zo koulz hag un torfedour é teurel ur paour-kaezh reuzeudik d’an douar hag é rediñ anezhañ da roiñ e yac’h.  
Von Bullow, Eñvorennoù, 1931

**Klozadur**: Merket en deus ar Brezel Bras get e feulster a-vil-vern enep d'ar soudarded (emgann Verdun er fozioù-difenn) hag ivez enep d'ar siviled (gouennlzh ar bobl armenian).

Treuzfurmet eo Europa àr an dachenn bolitikel (dispac'h e Rusia) hag ivez tiriadel.

Met e chom arvarus ar peoc'h.